




TROVENI VRAZ LOKORN E 1953

*1959 eo adarre bloavez an Drogeni Vraz. Greet e vo d'an 12 ha 19 a viz Gouere.
An 12 a vo devez braz yaouankizou Breiz, pedet gand ar Bleun-Brug.*

BLEUN-BRUG

Niv. 118 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

MAE-EVEN 1959

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur koum. a enor — 1.000 lur koum. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell deoh beza ezel euz ar **Bleun-Brug** pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.

C. C. P. 544.22 Nantes

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

Buhez an Iliz , gand L. B.	1
Hanter-kantved deiz-ha-bloaz kurunidigez Itron-Varia Gerni- tron , gand Konhoiarn	3
Êt da laer , gand Malo an Dig	5
Bleuniou war bez eur mignon , gand Reun Argant	8
Gouel Kendalc'h , gand A. Helou	9
Tantad Sant Yann , gand A. Helou	10
Yannig va Mignon , gand V. S.	12
Liziri digand misionerien	13
Keleier	14



Bleun-Brug Skol.

Daou Bleun-Brug-skol a vo greet e Leon
d'ar **yaou 21 a viz Mae**, e **Lanniliz** evid kreiz-Leon.

d'ar **yaou 28 a viz Mae**, e **Ploueskad**, evid Gorre-Leon.

Ar vugale a vo bet dibabet en daou leh-mañ a yelo goude da genstrivadeg Bleun-Brug Plougastell.

Skol-hañv 1959.

Dalhit soñj e vo dalhet or **Skol-hañv 1959** e Brest, e ti Seurezed ar Retred, e Kerstears, eul leh kaer meurbéd, euz ar **24 (lun) a viz Eost**, d'an **29 (sador)**. Digor eo ar Skol-ze dreist-oll d'ar re a ra skol, méd ive d'ar re-all. Prezegerien a dalvoudedez, on-eus adarre war on roll : an aotrounez **Falo'hun, Duigou, Bourdelles, Cor-**
merais, Abasq, Colleau, Abjean, de Guebriant, Dujardin, Triccoire, Riou, Uguen,
Brisson, Merdy, J.-M. Guilcher, Henri Queffelec, Martray, ar Minor, Yeun ar Gow,
Danielou, Mocaer, Michel (Ti-savour), Ollivo, J. ha V. Seite, Omnès... Ma ne hellit ket dond hoh unan, lakit re-all da zond.



133867

Buhez an iliz

Pa oe dibabet Yann XXIII da houarn an Iliz, meur a hini a lavare :
« Eur Pab koz !!! Araband gortoz kalz a jeñchamañchou diouctañ ».

Hag en e brezegenn Nedeleg, panao den ebed o hortoz, Yann XXIII a embanne an nevezenti vraz, edo en e zoñj boda, heb dale, eur Hoñsil-meur, evid studia hag en em gleved diwar-benn ar pezh a hellfe unani oll Gristenien ar bed.

Ar hazetennoù raktal o-deus deuet leun a baper ha lavared eur bern traou a-dreuz hag a-hed.

Talvouduz eo deom gweled sklêr, er gudenn-ze, ken pouezuz, ha klask kompren petra a zo a-nevez.

Ar Honsil-meur, e-neus greet On Tad Santel ar Pab ano anezañ, a vezo an unan-war n'ugentved, abaoe amzeriou kenta an Iliz.

An diweza hini oa Konsil-meur ar Vatikan, e Rom, bodet, er bloaz 1869, gand ar Pab Pi Nao. Kondaonet e ce, gand ar honsil-ze, ar re ne houlennont evid hentcha an den nemed sklerijenn ar rezoun hebken. Diskleriet e oe, ouspenn, evel artikl a feiz, n'hell ket ar Pab fazia, pa embann d'an dud, evel Tad an oll gristenien, ar pezh o-deus da gredi pe da ober evid beza salvet.

Eur seiz kant Eskob bennag a gemeras perz e labourou ar honsil, med ar brezel, dirollet, etre ar Frañs hag en Almagn, e 1870, a viras ouz al labourou-se da veza kaset da benn...

Petra eo eur honsil meur?

Ar honsil-meur eo an hini, ma vez galvet da zond ennañ, eskibien ar bed : ar re all a zo, e karg, hag a ro an dourn d'ar Pab da houarn an Iliz.

Evid beza **meur**, ar honsil a dle, da genta, beza digoret gand ar Pab. En e benn e tle beza ar Pab, pe, da vihana, unan, laket gantañ. Ouspenn, kement a vez greet ennañ a dle beza kavet mad gand ar Pab.

Pa vez an tri zra-se, ar honsil a zo **meur**, ha n'hell ket fazia. An artiklou a feiz embannet gantañ n'hellont mui beza cheñchet.

Peb Eskob, kemeret en e bart e-unan, a hell fazia, med pa vezont bodet oll-asamblez, dindañ galloud ar Pab, n'hellont ket.

N'eus ket, ha n'hell beza, diou houarnamant, en Iliz : ar Pab hag ar Honsil. Nann ! An Iliz, pried ar Hrist, a lavare Bonifas VIII, n'eo ket eur horv hag en-dije daou benn.

Ar Pab, Vikel Jezuz-Krist, e-neus, e-barz an Iliz, ar halloud leun da houarn ha da gelenn. Bez' e hell, anezañ e-unan, ober pe 'freuza lezennou, diskleria gwirionez pe wirionez, evel artikl a 'feiz. Med bez e hell ive, mar plij gantañ, en em harpa war eskibien ar bed evid ober al labour-se, ha setu petra ra, pa vez bodet ar honsil-meur...

M'o-deus ar honsilou astennet ar « Greto », a-hed ar hanvejou, n'eo ket ablamour ma 'z bet laket ennañ gwirioneziou nevez. Ar gwirioneziou-se a ao, er « Greto », diarôk.

Sant Visant Lerins, o komz, euz an traou-se, a gemer skwer war vuhez an den : « Daoust ha peb hini ahanom, emezañ, n'eo ket bet

bihanig-oll ? Ha pa vezom deuet da veza koz, daoust ha ni hell lavared n'om mui ar memez den, ha pa oam bihan... ? » Mad, evelse ive, evid ar feiz katolik. Lod gwirioneziou 'zo, evel Konsepsion dinamm ar Werhez — he zadidigez d'an nefiv, korv hag a ene — n'hell ket ar Pab fazia, pa gomz, evel doktor an iliz — ar gwirioneziou-se a oa er « Gredo », ez-vihanig. Gand an amzer, o-deus kresket, dre m'int bet studiet, anavezet muioh gand an doktored, gand ar gristenien, med ar gristenien, med ar « Gredo » n'eo ket cheñchet, rag ar feiz kristen ne jeñch ket, n'hell ket henn ober...

Petra vezo ar honsil-meur a zeu ?

Ne zeblant ket e ve ano ebed, er wech-mañ, da ziskleria eun artikl nevez bennag eur ar feiz.

Sklêr eo kouskoude e vo pouezet war hini pe hini euz kudennou an Iliz, en amzer- vremañ. Med dreist peb tra, hervez menoz ar Pab, e vo pouezet war ar pezh a hell strisaad al liammou etre memproù ar gwir Iliz hag ar re a zo distag diouti.

Glasket e vo gweled penaoz kaoud an tu da unani ar re oll, a zoug war o zal, merk ar Hrist, a lenn e Aviel, hag a zo, siwaz, disparti etrezo war leun a boentchou all.

C'hoant birvidig Or Zalver, ha c'hoant birvidig an hini a zalh e blas, war an douar, eo e teufe katoliked, schismatiked hag eretiked da gaoud ar memez feiz, da veza eur vandenn zeñved hebken, dindañ renadurez eur memez pastor...

Ez eo gouzoud, dioustu, pegen luet eo ar gudenn. Ha penaoz kredi e ve kavet diskoulm dezi, en eun taol, pa ouezom, euz eun tu, eo darn euz ar schimatiked kouezet dindañ kraban gouarnamañchou o bro; pa ouezom a hent-all, ez a ar Brotestanted, peb hini diouz e du, hag o-deus ken aliez a relijion eged a diegez, koulz lavared ?

Arabad e vefe fallgaloni, evelato, rag ar gristenien, daoust a beseurt rumm int, a zo labouret, en deiz hirio, gand youl vad da dostaad an eil ouz egile. Kaeroh, pedi kaloneg a vez greet, e peb koztezen, evid ar menoz-se.

Galvadenn Yann XXIII a zo trubuilhuz. Goulenn a ra digand oll diski-bien ar Hrist ankounac'haad an amzer dremenet, moug, en o halon, an oll houervoni dastumet enni, a-dreuz ar hanvejou...

Fiziañs a ranker kaoud dreist peb tra e Doue. Ar sklerijenn hag ar garantez a hell sila en eneou a zo dreist muzul. Ma 'z' eus eur bedenn hag a ya eeün beteg e galon, eo an hini a vez greet, gand komzou an Aotrou Krist, goude ar Goan ziweza ; « Tad, ho pedi a ran evid ar re oll a gredo ennoun, evid ma vezint oll unan, evel m'emaoh ennoun, ha me ennoh... »

E fin miz Ebrel, an Tad Santel ar Pab e-neus savet e vouez da houlen pedennou evid ar honsil. Goulennet e-neus digand ar bed kristen en em drei ouz an Itron Varia, gand muioh hoaz a zevosion, eged kustum, epad miz Mae...

Evel an ebestel, gwechall, pedom, ganti ha dreizi, ar Spered Santel da skuilh e zonezonou war an douar, evid ma houlaouo eur Pantekost nevez da laouenaad familh ar gristenien.

L. B.

Hanter - kantved deiz - ha - bloaz kurunidigez Itron-Varia Gernitron

Eur Gouel dispar.

Da hanter-Eost, er bloaz-mañ, e vo hanter-kant vloaz ma oe lakeet ar Gurnenn aour war benn Itron-Varia Gernitron.

Gand aotre sant Pi X, e oa savet Kernitron war renk ar Follgoad, Rumengol hag ar Porzou. Gouel dispar : an amzer a-du, tud a-vil-vern ha birvidig o feiz, eur brosesion greet gand seiteg parrez, donedigez an Eskob nevez, an Ao. Duparc, prezegenn vrezoneg helavar Kardinal-Arheskob Roazon, an Ao. Dubourg, Tregeriad genidig euz Logivi-Plougaz.

Trubuilhou ha kemmou diniver, gand daou vrezel da ziduda ar bed a-bez, a zo tremenet, abaoe hanter-kant vloaz, war an eñvor euz ar gouel-ze. Daoust da beb tra, ar Pardon a zo chomet en e zä. Hag ar Werhez santel a jom da Rouanez war ar horn-douar dudiuz-ze euz or Breiz. Daoust d'an oll draou mad a zo bet taolet d'an traoñ, daoust d'an oll re fall a zo bet skignet en o leh, Mamm Doue a zilezo nebeutoh a-ze Bro-Dreger, ma chom houmañ feal dezi war gont-pe-gont. Ra bedo eta Tregeriz, ha ra labourint, evid ma vo ar goueliou deread ouz Rouanez ar bed-oll ha kendere gand brud ar Vretoned.

Lanneur ha Kernitron, lehiou brudet.

Lanneur (pe Lannveur) eo ano eur manati bet savet en amzeriou kenta a dremenas on tadou-koz er vro-mañ.

Kernitron, anvet er penn kenta Kerfeunteun, a zeblant beza « kêr an itron » ; med n'eo ket sur tamm ebed, daoust ma 'z eo an Itron-Varia a zo enoret el leh-ze. Diwallom da gompren an anioù koz evel ma komprenom ar re a-vremañ !

E-kichen Lanneur ez eus bet eur hastell, anvet Kastell-Melar, pe Kastell ar Veuzid. Iiz Lanneur he-deus da Batron sant Melar.

Ar re anaoudeka war ar skridoù koz a ro deom da houzaad ar pezh a zo a wir euz istor sant Melar. Sant Melar a oa mab Meliaw, roue Bro-Gerne. Red eo derhel koun e oa rannet neuze ar Vretoned, nevez-douaret euz Breiz-Veur, etre teir rouantelezh : Bro-Zomnonea a-hed arvor an Hanternoz ; Bro-Gerne er Hornog hag er Hreisteiz ; Bro-Wereg e-kostez Gwened. Meliaw a oe lazeta gand e vreur Riwald. Hag hemañ a zeuas ivez a-benn d'en em zizober diouz e niz Melar. Korv Melar a oe beziet e manati Lannveur, ha diwar ze eo ez eus tro da gredi e oe lazeta Kastell ar Veuzid, e-kreiz Bro-Zomnonea kouskoude ! Perag ha penaoz ? A beb seurt mojennou a zo bet savet war an danvez-ze, med n'eus tu ebed da zidouezia ar hementad a wirionez a zo enno.

En amzer-ze a grizder digristen, kement priñs a varve en eur zivenn e wir a veze laketa gand an Iliz e renk ar zent. Red-mad oa, evid kalonekaad an dud habask ! Pa weler an niver a barrezioù pe a « lokou » a zoug ano sant Melar, e vezer douget da gredi eñsoh ar pezh a zaneveller diwar e benn ? Sklêr eo ez eus bet c'hoarvezet war e dro eun darvoud braz, hag a zo chomet an eñvor anezañ beo a-walh, dreist amzer an Normaned zoken.

Sklêrra tra a anavezom war Lanneur ha Kernitron eo e oent perhennet, beteg an Dispah, gand Eskopti Dol, bet diazezet, evel ma ouezer, gand sant Samzun. Anad eo dre-ze e oe savet manati Lannveur gand diskibled d'an Eskob sant Samzun. Pa lavarer deom e oe sant Maelor (e galleg Magloire), Abad kenta Lannveur, hag e savas war gador-eskob Dol warlerh e ves'r, ne gavom ket se souezuz.

Med a-benn sevel e Abati, e ranke sant Samzun kaoud douar digand ar roue. Digand pehini, Yona, roue an Domnonea, pe vab Juduall ? Ar skridou koz a lavar deom e oe digand Juduall, en abeg d'an harp a roas sant Samzun dezañ da zevel war gador-roue e dad.

Ama e tegouezom gand darvoudou anavezet sklér. Konomor, tiern ar Pohér (korn-bro endro da Gêrahez) e Bro-Gerne, a oe roet tro dezañ da vond da roue war Zomnonea. Diwar e zimezi gand intañvez Yona eo e oe roet lañs dezañ. Juduall, mab Yona, a oa c'hoaz eur bugel. Konomor a glaskas lakaad e graban warnañ, med hemañ a dehas da lez roue ar Franked, Kildeberz. Konomor ne blij e tamm ebed da Eskibien Vreiz : digristen oa ha riskl a oa da weled anezañ o tond da Vestr, n'eo ket hebken war Zomnonea, med c'hoaz war Vro-Gerne. Ouspenn-ze, an eskibien, o kemer ar Franked evid heritourien d'ar Romaned a zoñje e tlie ar Vretoned plega d'ar Franked evel m'o-doa greet d'ar Romaned.

N'eo ket souezuz eta gweled sant Samzun o vond da lez Kildeberz, evid kaoud an aotre da gas gantañ Juduall, evid brezelia ouz Konomor. Hemañ a oe barnet gand an eskibien da veza torret euz e garg ha nebeud goude e oe lazet en eun emgann. Dre anaoudegez vad, Juduall a roas da Zamzun douar endro da Gastell ar Veuzid, evid sevel eun abati.

Abati Lannveur adsavet e Kernitron.

Ne ouezom netra war an abati-ze beteg ma tirollas an Normaned war or bro. An abati, evel just, a oe dismantret. Med pa oe adsavet e oe ret kaoud meneh euz eskopti Dol : re Abati sant Jakud-en-Arvor. Sevel a rajont Prioldi Kernitron, a jomo en e zav beteg an Dispah hag a vo gouestlet d'an Itron-Varia. An Duk Alan Varveg, treher an Normaned, a oa douget-kenañ d'an Itron-Varia. Eñ, marteze, eo a roas urz da adober labour sant Samzun e Bro-Dreger. Pa darze ar brezel diweza, e oa mil bloaz abaoe.

Kernitron a zo stag e ano istor ouz or bro kement ha Lannveur ha muioh zoken.

Diwar ar zoñj-ze e tlefe ar Vretoned katolik en em lakaad da boania da ober a nevez euz Kernitron eul leh a bedenn evid ar paour-kêz Bretoned ma 'z om. D'ar Bleui-Brug eo gweled !

Kernitron a-dreuz an amzeriou.

Ar veneh-beneadiz deut euz Bro-Zol e reas vad e Kernitron. Eur hlañvdi gouestlet da rant Koulman ; ennañ e oe dalhet diwezatoh an dud trelatet. Eul lordi, savet el leh anvet « al laourou » (an dud lor). Evid ar berhirined, eun ti-degamer, anvet « an Hospital pell ».

Pa oe degaset Biz sant Yann d'ar japel a oe anvet diwar neuze Sant-Yann-ar-Biz, ez eas war gresk niver an dud a dremene dre Gernitron.

Pa oe staget Breiz ouz Bro-Hall, ar veneh ne helljont mui dibaba o Abad. Ar roue eo a anve anezañ diouz ma plije gantañ. Diwar neuze ar veneh a guiteas Kernitron. Med eskibien Dol a gendalhas da envel Priold e Kernitron.

Beteg an Dispah, evelato, al leh santel ne oe dilezet na gand ar brioled, na gand aotroned ar horn-douar, na gand ar berhirined... Nebeud a-raog an Dispah hebken eo e krogas al leziregez en aotroned e-keñver ar relijion hag al leliou santel.

D'an Dispah, ar gouarnamant a lakeas madou Kernitron e gwerz. Kavet e oe eun aotrou e feiz divrall d'o 'frena evid an Iliz : an Ao. Sebastian-Yann-Vark Trogo, Aotrou Kerlesi. Breur oa da berson didou Lanneur ha lezel a reas gand ar veleien feal an implij euz iliz Kernitron, e-pad ma serviche an iliz-parrez d'ar veleien-douerien.

A-houdevez, Itron-Varia Gernitron a zo bet darempredet gwelloc'h-gwella, beteg ar bloaz ma teuas an Ao. 'n Eskob Duparc — Doue d'e bardono ! — da ziskouez da Rom e oa dleet ar Gurunenn aour da Itron-Varia Gernitron, evid brasa enor ar Werhez ha brasa mad he daremprederien.



Ma 'z eom da Gernitron er bloaz-mañ, ez aim, a-dra-zur, gand eur spered hag eur galon denheñvel ouz re an oll gatoliked a ya da enori ha da bedi Mamm Doue. Or pedenn ne hello ket beza disheñvel diouz hini n'eus forz pe gatolik all. Koulskoude, n'or-bo ket ar gwir da ankounac'haad ez om Bretoned. Hag en eur zoñjal er Vretoned, or breudeur tosta, n'eo ket hebken er re zivroet e soñjim, pegement bennag a ezomm e-deus euz or harantez. Er Vretoned a zo endro deom e soñjim ive, hag ennom on-unan. War ar beg-douar-mañ, e-keñver eur mor a draou, emaoñ erruet e-kreiz ar broaz-hent. War be du e troim ? Biskoaz n'om bet e ken braz teñvalijenn. Ha ne welom mui peleh, nemed e Kalon zinann Mamm Doue e vefe, e kavim ar sklérjenn da zibaba on hent hag an nerz da vond gantañ, pegen tenn bennag e hell beza !

Konhoiarn.



ÉT DA LAER

(Kendalh)

gand Mab an Dig.

IV. — Skarzerien !

Ar gwad e-noa ruilhet ouz or feskennoù. Petra fell deoh ? Pennou fall ! Koulz lavared en noaz on-oa ranket dihani er vered, gleb-dour-teil o c'hwezi, unan o lavared deom, ma ne yafem ket buannoh e oa prest ar foz evidom !

Leun wad or skoaziou, ni on-oa douget barrinier, on treid en erh ha goullo or hov.

« N'ho-peus ket a vutun ? Sellit. » Eun Almant-all, eur fuzuilh gantañ ive, a roas deom beb a bakad, he beb tro m'or gwele e ree heñvel.

Na pebez bro zouezuz ! E kreiz al lehi, setu eur vleunienn zispar.

En or hêr-ni, pa welom unan o veza kriz evid ar re all, e lavarom dezañ da genta teurel evez, ha goude, ma ne gompren ket, gwaz a ze evitañ, e roim dezañ eur zêad.

En Almagh, ar re griz a oa e penn. Evid plijoud dezo e oa ret beza kriz. Hag ar re na felle ket dezo heuilh al lezennou spontuz a ranke labourad dre guz en aon da goll o madou hag o buhez.

— *Raoust !* Ho taou ganin-me ! (Ni a oa o varvailhad.)

— La, eme Job, da beleh ez aim gand hemañ ?

Or has a reas da gichenn eur harrig, leun ennañ a gorzennoù.

— Schnell ! emezañ.

Ni a jomas a-zav, dirag al leh ma vez ennañ peb hini oh ober e dro bemdez.

— Eur vicher nevez, Job. Skarzerien !

— Ya, he netra da laerez, eme Job.



Ni a stagas gand al labour, goustad.

Skarza ! Skarza !

« Pa zeue an diskar-amzer, eme Job, e plije din henn ober. Me a sterne daou louaj, ha dao d'ar bern teil. Ar forh a zanke ennañ, êz da genta. Ne oa

nemed kolo melenet. A-nebeudou e teue da galedi ar bern. Gand ar hrog e ranked mond dezañ dizale. Maged a zave dioutañ, hag a yee d'en em goll uhel en oabl gand mogidell miz Gwengolo ha miz Here. Ar c'hwez a zave anezañ ne zisplije ket din : n'oa ket pounner ha karget oa a bromesaou evid an eost founnuz a deufe diwarnañ. Ar yer, renet gand ar hilhog braz a dostae da glask preñved. Ar merhed en eur dremen a zelle ouz ar wazed war gorr o roched, gleb o c'hwezi, dizolo nervennoù stard o divreh. Or botou a zanke en teil tomm a stage ouz on treid. Met dour a vo kavet emberr, dour d'o gwelhi ha da welhi ar porz a vo kempenn eur pennad evel porz al leur-gêr...

Nann, ne zisplije ket din skarza ! Met amañ, an danvez, ar c'hwez, n'int ket heñvel ! »

« Warhoaz e tizroot ! » eme deom on diwaller.
Paket krenn om, va 'faour-kêz Job !

Bemdez, ni 'yeas gand ar harrig, ar horzennou.
Goustad ez eem gand ol labour, hag e oem souezet o klevet eun deiz paotr ar fuzuilh o lavared deom mond goustatoh c'hoaz.
Ar re-all a ree goap ahanom, êz deoh gouzoud. En em welhi mad a hellem goude al labour. Evid ober an heg, e lavarent e oa ganeom c'hwez ar roz ! Ne oem ket pell evid gounid fiziañs or mestr... hag a roas deom an alhweziou ! Eñ a gave gwelloc'h mond da eva banneou bier eged chom hed an deiz da c'hwesad.

E peb leh ez eus traou da skarza, er magajennou evel e leh all. Aze edo an taol. An neb e-neus alhweziou eun ti a zo mestr warnañ.

D'ar pardaez, er garrigell, dindañ ar horzennou, e veze kuzet traou a dalvoudegez.

Ni a oa en em lakeet en eur horn-tro er varakenn, hag e-pad ma tebre ar re-all o zoubenn rutabaga, ni a zispake kig, gwin, kouignou ! Lod a dostee o fri, med Job a lavare dezo : « It alese ! Gand ar skarzerien n'ez eus ket a hwez vad ! »

Bemdez e veze bremañ heñvel. Ni a gemeras, êz deoh gouzoud, truez, ouz ar re all ; ha pa welent o tond, en dremmwel, karr storlokuz ar rinserien, leun a galonou a dride.

Nag e oam deuet mad gand an dud ! Meur a hini e-nije bet c'hoant dond ganeom da labourad. N'eus micher fall ebed, gand ma vag he den. Med pa vez kavet aour er wazenn, arabad beza re o vond dezi, pe e savo tabut.

« Biel ! Biel ! Deus da weled 'ta ! Na pebez barrikenn ! Ne hellfe ket mond dre zor-dal Lanbaol ! »

Me a zistagas ganti taoliou boutou.

« Re gal ! Leun eo ! Petra zo enni ? Alhwez an nor, Job, ma welim ! »

Eur skeul a oa red. Ni her havas en eur horn-tro.

— Biel ! Biel ! Va 'faotr-me ! Butun ! Pakajou butun ! Kerz da gerhad eur zah !

— Arrelaj butun, Paol Gorneg ! Ha ! ha ! ha !

Ar garrigell a oe leun a vutun d'ar pardaez. Pell 'zo n'on-oa bet koulz lavared tamm ebed. Ni a rannas euz ar gwella on teñzor. Ar varrakenn a oa leun a voged. Ar maged, gweled a rit, a lak da zevel an huñvreou. Nijal a reont warnañ hag e teuont da veza bleuñv dudiuz. Ya, zoken ar zoñjou melkoniuz gantañ a zo livet, a gemer eur stumm-all, ha, dreist-holl er vizer, gantañ e vez pareet, kennerzet ar halonou goullet...

Bemdez ni a yeas da skarza e kambr ar varrikenn, lia da skarza ar varrikenn.

Eun deiz, en eur zond er-mêz euz ar « block », en em gavas ganeom, eur fuzuilh war e skoaz, ar zoudard almant a roe deom, n'eus ket gwall-bell, butun.
— Va 'faour-kêz, emezañ, tailhet eo bet deom siwaz, med deus warhoaz...

— Nann, nann, sellit !

Godellou e baltog, e lavreg, a oe leuniet, heb m'e-nije bet amzer da lavared grik, hag e chome digor e henou.

— Deuit d'or gweled beb tro ma hellot. Kenavo ar henta !

Au dud ne ouient dare mui e peleh kuzad o 'fakajou dudiuz. Lod o-doa aon lakaad re en arrelaj, med peb hini a ranke kemer e riskl, ha Job a yee droug ennañ pe wele lod en entremar. Padoud a reas pell an istor araog ma weljem strad ar puñs.

— Dizourziuz e vim pa vo goullo, eme Job. Ma kavont ar varrikenn hanter-leun, e klaskint da beleh eo eet an hanter all. M'her havont goullo, e klaskint hebken e peleh ema an hini leun.

Goullonderet e oa, ha ni, ar peoh en or houstañs, a glaskas traou all da zamma en or harrig muia-karet.

Ya ! Muia-karet ! Peb hini a gar ar pez a zigas dezañ bevañs ha plijadur. Ar houet a gar e barkeier, ar martolod e vag. Daoust hag ar merhed aliez ne garont ket o gwazed, dreist-oll ablamour ma tigasont arhant d'an ti, ha tro dezo, evelse, da jom da bladorenna, da eva kafe, ha da gaoud dilhad kaër ? Ma kouez en e boull benveg o eurusted..., goude beza gouelet dezañ eun tammig, e klaskont eun all, unan frouezusoh ma hellont !

Or harrig kër, nag e karfen e weled ! Bruzunet eo bet, douetuz, gand kemend a draou all !

Pa deuas ar poent da ranna ar butun etre ar zoudarded, nag a freuz a zirollas !

Ni a rinse, ni a rinse ! Sioul, evel ma ne rajem ket a van ouz ar youhadennou skiltruz a dregenne a beb korn.

Kerkent ha m'on-oa gwelet an dremmwel o teñvallaad, ar barr-arne o tond, êz deoh gouzoud, on-oa roet an alhweziou d'on êl-mirer. Krena a ree ! Beb tro ma tremene eun ofiser, tiz warnañ e strake e votezennou.

Ni a ziskenne er poull dour-añvoez gand beb a bilprenn. Gwelloc'h e kavem beza eno, oh ober an neuz da labourad, rag, war an douar, an avel a zourre. Gand tud hag a goll ken êz o 'fenn dre gounnar, ar pella, ar gwella beza !

Daou aotrou a deuas, a gomzas gand ar gward, a zoublass o 'fenn a-uz d'an toull. Ni a lakee da skragna, gwasas ma hellem, on daou bilprenn. Med ret e oa deom tarda. E galleg ez eent... paotred ar Gestapo douetuz.

— N'ho-peus gwelet den ebed war-dro d'ar varakenn ?

— Peseurt barrikenn ? eme Job.

— An hini er penn all.

— O ! eo ! Leun a dud a welom bemdez.

— Ha ! Ha ! Ha petra a oa ganto ?

— Lod podou, lod all liñseriou, lod all fuzuilhou.

— N'ho-peus ket gwelet tud gand butun ?

— Eo, eo, tud o fumi.

— N'eo ket an dra-ze a houlennom. Tud o laerez butun ?

— O laerez butun ? Tra.

— Nê ouñeh ket e oa butun eno ?

— Ni ? Penôz on-dije gouezet ? Ni a ra ol labour heb selled war-dro deom. Me n'em-oa lavaret grik, hag em-oa kemeret an êr genaoueka ma hellen. An daou aotrou a yeas gand ar foulter en eur behi.

D'ar pardaez, avad, e oe furchet ha difurchet or harrig. Eul lakepod a lakaas zoken e fri er gorzenn, da weled, douetuz, ha c'hwez vad a oa ganti.

D'an deiz warlerh e oem harluet, Job ha me !

(Da genderhel.)

Bleuniou war bez eur mignon

D'ar zeiteg a viz Meurz diweza e varve e ospital Prosper Chubert, e Gwened, ar skrivagner Youan en Diberder, anavezet e-touesk an dud euz an Emzao Breizeg a zo bremañ eet eun tammig war an oad. En e zeg vloaz ha tri-ugent edo, rag e kêr an Oriant e oa bet ganet, d'an 29 a viz Gouere 1887. Mab e oa d'eun alvokad brudet da veza prim ha taer.

Dianav e seblant beza d'ar re yaouank, rag sammet e oa gand ar hlenved : abaoe meur a vloaz e oa ehanet da skriva, pe gentoh, da embann e skridou. Daoust d'ar poaniou a gorv a houzañve, e veze dalhmad yah ha prim e spered hag e labour e c'hoaz gand e bluenn.

Pa vo lavaret ez eo bet gouestlet e vuhez da Vreiz, d'he lakaad da veza anavezet, ar wirionez ne vo ken. Ampart e oa da skriva, kerkoulz e brezoneg hag e galleg, ha souezet e chomer o weled ped ha ped pennad, ped ha ped studiadenne e-neus savet diwar danvez Breiz : ar yez, ar gwerziou koz, e-noa koulz lavared pennaouet feskennadou anezo, ar misteriou hag o oberourien, an dud vrudet, an ilizou, ar hestell, ha me oar-me. Ouspenn ar skridou moulet, lod war e ano, lod war eun ano-pluenn bennag, e chom diembann, evid abegou a zo, eur bern re all a vije ganto peadra da ober levriou teo.

Rag, nemed er bloaveziou 1912-1913, ma hellas embann, diwar e goust, ar hannadig « *Brittia* », n'e-neus ket bet dalhmad frankiz da zisplega e zoñjou evel ma oant deut gantañ. D'al lealdet e oa douget, hag e kave dezañ ne oa ket ar wirionez evid ober droug, daoust pegen c'hwero e vez da lonka. Aliez e lavare e oa ober vad da Vreiziz diskouez dezo penôz emañt, ha n'eo ket penôz int bet taolennet gand tud vad a faltazi vraz. « Euz ar gaou, emezañ, ne deu petra vad. » Gwir Gelt brezelgar, e yeas Youan en Diberder d'an emgann, a-wechou heb beza klasket hag-eñ e oa tu da ziluzia ar gudenn heb terri netra. E enebourien en em harpas war dud hag a vije deut en tu gantañ war bouez beza bet hegaratoh en o heñver. Hiniennou a oe feuket ha chifet gand ar pez a ginnige dezo da lenn kriz ha diardou, hag o-dije asantet, ma vije bet pasket flourroh an tamm. Trouz a zave, kement ma rankas aliez mond diwar dachenn pe dachenn. Gwaz a ze dezañ ha deom-ni.



Mar doa taer ha huaneg, ober gaou outañ e vefe fremen heb meuli ar feal m'eo bet d'e vignoned ha dreist-oll d'ar barz. Yann-Ber Kallou-Bleimor, a oa bet e geveler war dachenn « *Brittia* ». N'eo ket hebken dre ma oa awenet e varzonegou eo deut mab dizeüruz martolod Groé da veza anavezet, da aked ha da strivou Youañ En Diberder eo dleet ivez. Ha meur a wech e oe klevet hennez o sevel e vouez da ganmeuli skrivagnerien pe arzourien vreizad n'o doa ket, hervezañ, an ano kaer a zellezent. Lod anezo n'e-noa biskoaz toulet kaoz ganto, na zokén o gwelet. Bezet soñj ar re o deus lennet, gwechall, ar penna-dou sinet gantan Youenn Didro.

Eet eo bremañ diganeom ; ne vo feuket dén ebed kén gand e gomzou nag e skridou. Pa garo, avad, unan bennag mond war e roudou, kas da benn an irvi boulhet gantañ, e teuo anad ez eus bet euz « Mab en Diaoul Ru ag En Oriant » eun dén a dalvoudegez eur servicher kaloneg d'e vro, hag e-neus sanailhet, evid Breiz da zond, eun eost founnuz, na hellfe bremañ hini ahanom dastum kerkoulz hag eñ.

Reun Argant.

GOUEL KENDALC'H

e Kemper, d'an 12 a viz Ebrel 1959

Klevet ha gwelet ho-peus, emichañs, kement tra a zo bet e Kemper, bremañ zo c'hweh zun paseet, d'an 12 a viz Ebrel. Ar gazetenn he-deus kôzeet trawalh ha setu n'ez an ket da lared deoh ar pez a ouzoh dija. Med n'eo ket bet diskouezet deoh dre ar munut penôz eo bet kont eno.

Diouz ar mintin oa bet dalhet an traou eun tammig, ablamour ma ree glao-pil evel tôlet gand eur skuell. Ma, goude lein, dre hras Doue, oe dizammet an amzer hag eun heol benniget oa deut da bara evid digas tud da zal vraz ar goueliou. Eno neuze oa bet, adaleg diou eur beteg eiz eur hanter diouz an noz, eur fest euz ar seurt n'am-oa ket gwelet c'hoaz. Rag moarvad abaoe pell 'zo n'eus ket bet goueliou mod-se 'barz ar vro. Tud oa deut a heb korn euz Breiz : euz bro-Roazon, euz bro-Naoned, euz Sant-Malo, Gwened, hag, eveljust, n'eo ket dao lared deoh, euz Breiz-Izel.

An oll dud-se a oa ken laouen ma oe youhadennou ha skrijadeg epad an abardaez, ar pez na vez ket klevet e-barz ar salliou-dañs all. Ez eo gweled eo spered an dañsou-bro a zo 'barz o spered d'ezo. An dra a gaved plijuz-tre oa pa yee ar baotred da glask merhed da zañsal, bepred e ouient ober, evel er balliou mod-nevez. Ha pa veze krog eun dañs bennag, den ne jome da zinta ar mogerioù pe da vralla e gloh euz an eil ostaliri d'egile. An oll a yee 'barz an dañs en eur heja o fenn hag en eur gamma o gar gand eur youhadenn skiltruz. Ne hellem ket chom war or hador : ouz kanerien Poullaouen n'eus ket tu da hada. E kreiz piau n'he-dije ket lammet e galon pa gleve :

« Stokom on treid d'al leur-zi, ken greno ar soliou
ha ken strinko ar vein-glaz diwar an toennou ! »

Ha ne oant ket o-unan : sonerien biniou a oa deut euz Lycée Kemper, euz Boulvriag, mestr ar zonerien hag eur zoner akordeon euz Botmeur. N'eo ket dao deoh beza souezet mar lamme an dud 'barz an dañs, ha ma strinke ar c'hwezadenn euz penn o henseurted.

Keid ha ma veze an dud o tiskuiza e oa kanadeg gand re Lycée Kemper ha de Boullaouen. E kreiz ar bal oe tennet bilhejou Lotiri Kendalc'h. Eur blijadur oa gweled an oll gand o bilhed 'barz o dorn, sioul evel ken aliez a skeudennou sent, pa veze ar plah o tispaka ar bilhed mad, ha trouzuz evel diaouled goude ma oe huchet an niverenn a houneze.

War-lerh an dra-ze oe roet gand an D^r Dujardin priz braz 1958 da Fanch Inizan, euz Trelaouenan, evid ar yez, ha gavotennou dioustu war-lerh evid an dañserien diskuizuz (1).

Ma, 'benn ar fin, an heol oa diskennet 'ba 'mesk tier Kemper, hag evel ma teñvallae an amzer, sklerae an dud 'barz ar bal. Ha war dro eiz eur pa oam erru war or gwalh oe dao deom dihana gand ar skuizder hag ar zehed. Neuze pep hini a yeas d'an ostaliri da garga e doull ha da zistaga plañyou (2) fentuz. Goude oa eur fars gweled an dud o vond d'ar gêr en eur skleñja o horv pounner, hag en eur zistaga eur c'hwitelladenn gavotenn a lare dre he son :

« Me 'zo 'houl, me 'zo 'houl... eun all... eun all... eur fest all, n'eo ket gwir 'ta ! »

A. Helou.

(1) Diskuizuz : na hell ket beza skuizet.
(2) Plañyou : rimadellou.

Tantad Sant Yann

Pebez plijadur ! Soñj am-eus euz ma yaouankiz, an amzer am eus tremenet e ti ma mamm. Degouezet an hañv, degouezet gouel Sant Yann, an oll en em gemere evid tantad ar bloaz. 'Barz ma hêr, ar re yaouank hag ar re goz, ar re a lak o amzer da sklenja o horv dre ar meneioù, ar sklokerien, neketa, a veze abaoe eur zun arôg o furchal ar hoajou, al lanneier, o tirañsa bleñchou seh ar gwez, o tastum skolpou ha brenn-heskenn e ti ar halvez, bemdez e vezent gwelet eur zamm goad ganto war o chouk o vale dre an henchou don ha prieg.

Eur bloavez e oa bet brao kenañ. 'Barz ma hêr ez eus enn dachenn goleit gand gwez-fao braz ha hir; dastumet on-oa bet ar mez a oa kouezet diouto ha greet eur mell bern ganto e kreiz ar mene.

Deut an noz, debret koan gand tud kêr, an oll en em gave an eil war-lerh egile en eur sklenja eun horzenn geuneud; neuze ma zad renke anezo an eil war egile evel kregi gand eur voundenn-ed. An noz a oa sioul hag al loar a dôle he sklerijenn amann war peb tra. Euz ar prajou tro-war-dro e kane ar raned euz kreiz o helon hag e lakent ahanom d'ober kemend-all. Or halonou ive a oa yah ha laouen, ha ken laouen ma veze klevet euz a bell or youhadennou o ver-vel dre ar hoajou braz, ha re ar hêriou all o tond deom dre war-horre ar stan-kennou ledan.

Kreiz tout, ma zad, eun torched plouz gantañ entanet 'barz e zorn a lakae anezañ 'barz eun toull bihan greet 'barz ar bern keuneud. Neuze 'veze klevet ar hoad o strakal eun tammig, ha dioustu e welem eur houlaouenn wenn ha hir o tilampa diouz ar bern, en eur gas eur zamm maged ganti d'an neh.

An dud diarhenn ha diskabell en em lakae dorn ouz dorn, ha bihan ha braz, yaouank ha koz, paour ha pinvidig a zistoke war eun ton gavotenn n'e-noa fin ebed.

*« O ! gwechall, pa oan yaouank, me oa eur paotr dizoursi,
Arhant 'm-oa 'barz ma godell o tond d'an ostaliri. »*

Plijadur a oa leiz ar gasketenn.

Ma, 'benn ar fin, pa oam erru skuiz a-walh o tañsal, peb hini a groge da lavared e glemmou d'ar ganerien, ha dirag eun tan ken braz ne oa ket brao ehom.

— Laka 'rit ahanom da goll on dour fenoz !

Eun goz euz kêr, hag a ree eur blijadur ganti selled ouzom o tifrinkel ken hir ha ma hellem, a lavare war ar marhad, ablamour da ficha malis 'barz on brohenn :

— Ma n'eo ket eur vez 'ta klevet tud a zo 'barz o brud kôzeal e-giz-se ! Ma vijen-me bet 'barz hoh oad deoh, m'em-bije lampet dreist tour Karaez ! Ale ! kanerien, dalhit c'hoaz eun tammig ; an dra-ze lako ar herh da zevel 'barz plas al laou, a zigasô anezo diflaoutet eun tamm bihan !

— O ! mamm-goz, c'hwî eo brao deoh selled ouz ar re all o tañsal. Med, mar gav deoh lared n'om ket gouest da bada ouz kanerien, dizonjit ! Gwelet e vo piou vo krevet ar henta.

Stoka 'ree on treid d'an douar ken na ziskane ar mene ganeom.

Pa oam erru war or gwalh, ar vamm-goz, diskui evel oa-hi, oa deut 'barz an dañs en eur huchal.

— N'ho peus ken nemed ober evel don, gwazed Kergeonez (Kergeonez eo ano ma hêr).

Ober a ree ar paour-kêz koz lampou pik d'an neh keid ha ma halle. 'Benn ar fin, peogwir en em sklenjem evel sahadou youd, e oa gwelloc'h deom dihan eged ober visou sod e-giz-se.

*« Echui a reom or zon bremañ kompagnunez,
krevet 'neus an dañserien, ni 'zo mestr 'bar barrez ! »*

— Reit 'peus an dachenn deom, marteze, met tapet 'peus anei ive !

Neuze om ken skuiz ha ken skuiz an eil da gas egile. Ale ! eur skudellad chistr da zistana or gourlanhenn : goneit mad on-eus anei fenoz. Dañsadeg a oa bet, keid ha ma pade eur fulenn lan d'ober sklerijenn. Setu, pa n'oa goulou ebed ken nemed hani al Loar, ar vouez kreñvoh a oa 'barz an asamblez a huc'h :

— Pegement ar bern ludu-mañ ?

— Kant lur, 'lavare eur vouez. Daou hant, hope eun all. Tri hant eun all c'hoaz.

— Den ebed lak ken ? Den ebed ken ? Eur wech... diou wech... teir gwech ! Ale, gwerzet !

An deiz war-lerh, mintin mad, an hucher a yee 'n eur redadenn da iliz Kleden da laka an arhant-se 'barz plad an Anaon.

An Anaon ! A ya ! Kôz an Anaon a veze bepred ganeom, ha pa veze eur fest bennag ar re goz n'ankouaent ket da lared :

*« Ni zo amañ o soñjal êz,
met an Anaon du-ze zo diez. »*

Setu m'en em lakaem da lared pedennou. Goude maro an tantad e taoulinem en dro d'al ludu hag eun goz a lare gras evid kônsoli on tud koz a oa du-ze en tu all d'ar mor, e kreiz an tan. An hini goz a groge war ar bedenn ha ni oll a responte. Goude e kanem teir werz : hini ar garnel kristen, an ene mad hag ar varn diweza.

*« Me oa eun den kreñv a galon,
ha me eun den gentil,
me oa eun den pinvidig,
ha me eun den abil. »*

*Me 'm-eus kollet ma noblañs,
ha me ma oll danvez,
ma nerz ha ma gened,
ha ma gwiadeged (1).*

*Setu m'oun amañ bremañ
torret ha bruzunet.
Oun lakêt 'barz an douar
magadurez d'ar preñved... »*

Echuet ar pedennou an oll dud en em gave en o zi, santel evel manahed.

Goude euz or gwele e klevem an hucher-noz o yudal hir 'barz ar prajeier teñval. Eur zin a groaz war or bruched en em skoachem dindan ar golhejou pell kerh evid kouska c'hweg epad an noz.

An deiz war-lerh, peb hini a gemere eun tamm euz bern ludu Sant-Yann hag a yee da skuilh anezañ war e irvin hag e chonañ : eur vrizenn a oa trawalh da gaoud e fin ar bloaz eur gwall goañv braz spontuz.

Setu aze tud euruz da viken. Ma ! maro eo an oll dud-se ha maro ganto tantad Sant Yann.

A. Helou.


(1) **Gwiadeged** : stumm koz euz ar ger **gouiziegez** eo-moarvad.

Yannig va Mignon

Ton : Skoseg.



O yan-nig eo va mi-gnon, va mi-gnon, va mi-gnon. O



Yan-nig eo va mi-gnon ar mar-heg yaou-ank.



1. Eul lun-vez vin-tin Yan-nig ar mar-heg yaouank, koant, se-



der laouenn ha dran-tig, en em ga-vas em hoant, O!

1. Eul lunvez vintin, Yannig,
Ar marheg yaouank koant,
Seder, laouen ha drantig,
En em gavas em hoant.
2. Edo e kêr o vale,
Hag eñ war eur marh gwenn,
Ha dre an hent e kane
Yaouankiz a bouez penn.
3. Ha war e varh bokidi :
Bokidi kaer meurbéd.
Hag ouz e heul soniri.
Kaerroh ne gaver ket.
4. En-dro dezañ marheien
Ganto kuiteet o hêr ;
D'e heul ez eont, da zivenn
O bro dezo ken ker.

Troet diwar ar Zaozneg gand V. S.
evid Kanerien Leon.
(Evit kaout an disk,
skriva d'an Ao. Abjean, kure Landi).

EUN DISK NEVEZ ALL C'HOAZ

Pinvidikaad a ra atao diskaoueg Kanerien Landi. Setu disk an Ollzent deuet er-mêz dindan eur golo disheñvel. Warnañ e kaver : 1. Kantig ar Baradoz — 2. Baradoz dudius — 3. Intanvez ar moraer — 4. Kantig ar Purkator — 5. Euz kreiz an douar — 6. Pedenn — 7. Pedenn 'vid an Anaon — 8. D'an dud paour-ze (Languentibus) — 9. Selaou va breur ker.

Goulennit an disk digand : Ao. Abjean, kure Landivizio. Da heul an disk ho pezo eur harnedig roneoskrivet warnañ ton ha komzou ar hantikou.

Liziri digand misionerien

... « Daoust din da veza eur Breiz-Uhelad, lenn brezoneg eo evidon, kollet e koadou-meur Bro-Ganada, ar blijusa plijadur. A-raog ar brezel diweza, eur houmananter feal e oan da « Feiz ha Breiz » betek an niverenn ziweza. Peseurt kelaouenn bremañ a zo en he leh ?

War eun niverenn goz euz « Breiz » em-eus komprenet ez oh sekretour ar B. B. ... Me 'garfe gouzoud pe gelaouenn a embannit bremañ hag ar priz anezi. Me 'zo eur misioner O.M.I. er vro-mañ abaoe 22 vloaz, e-touez Indianed. Hogen daoust din da vere kuiteet va Breiz karet ha da veza ivez eur heodedour kanadian, va halon a zo chomet em bro genidig.

Daoust hag embann a rit levrioù brezoneg relijiel, pe get, hag e peleh o 'frena. Bennoz Doue en araog.

Gand va gwella gourhemennou, va B. K. ha ra vezo an oll Vretoned unvan adarre evid mad or Bro. »

Ebrel 6-59, P. Gu. B.

... « Bennoz Doue deoh evid al luhskeudennou a-liou diwar benn Breiz. Nag a blijadur on-eus bet o selled outo, dreist-oll an tad superior, euz Kolloreg, ha me. Résevet am-eus ivez levrig kenstrivadegou ar B. B. 1959. E skeud ar gwez palmez, en eur vale dre ar riboulou, em-eus dudi ouz o hana.

Mission Mossendjo a zo bet kemeret er bloaz 1936, hag ar gouent genta a zo bet savet gand eur Frer euz Plouviat e Breiz-Izel, ar Frer Iloi-Jaouen. 28.000 a dud a zo en or parrez, hag en o zouez 5.000 a gristenien. 160 ha betek 180 km. a zo, a-wechou, etre ar heriadennou. Pebez kudenn evid ar visionerien gweled an oll gristenien ! Broioù a-bez a zo amañ digor da sklerijenn an Avel. Da Nedeleg diweza ez eus bet badezet 104 dén, ha 90 all a zo o hortoz...

Eur skol gristen a zo amañ ha diou all e-kreiz ar brouskoajou. Méd ar skolioù amañ a zo e-riskl da veza nasionalizet ha laisizet.

Diou leanez (euz urz Sant-Meven) a zo amañ abaoe 6 miz. Eun deirved a devio da viz Mae a zeu. Ober a reom war-dro ar vorianezed, deski dezo gwriad hag ober stamm.

Pedi a reom Sent hoz or Breiz d'or zikour, ma hadim en-dro deom sklerijenn ar feiz..

Dond a ran a-benn da houzañv an domnder. Ar pezh a skuiz ar muia eo ingalded an deizioù. Euz penn ar bloaz d'egile e sav an deiz da 6 h. hag e tiskenn an noz da 6 h. 30... »

1414-1959. Seur Jeanne-Bernadette.

Al leanez-mañ, betek warlene, a rec skol e Kerzent-Flabenneg. Ober a ree skol vrezoneg d'e bugale, deski dezo kana en eun doare dudius, hag o lakaad da gonkouri da geñver ar Bleun-Brug.



KELEIER

Devez ar Brezoneg.

War houlenn ar Ministr, on-eus ranket diblasi devez ar brezoneg. An deiz a oa bet roet deom a zo bet kemeret gand Madagaskar. Klasket ez eus bet eur zulvez all a-raog an hañv. Respontet ez eus bet deom ne oa sulvez libr ebed. Laket e vo eta devez ar brezoneg goude ar vakañsou braz, moarvad e penn kenta miz Here.

Ar Brezoneg er Skol.

Emgleo Breiz, a-unan gand ar C.E.L.I.B., a ra e zeiz gwella evid klask lakaad ar houarnamant nevez da zigemer or mennad-lezenn-nevez o houlenn ar brezoneg e-giz eil yez er vachelouriez. Ne zebant ket beza éseet an hent. Red e vo d'an oll Vretoned, unanet stard, skei kalet war an tach evid ma teulo an abadenn da vad.

Labour Skol ar Bleun-Brug.

Bugale skol Sant-Fregant, Finister, dalhet gand leanezed St-Joseph de Cluny, o-deus bet kaset, d'an ao. Seite, al lizer brezoneg-mañ, warlerh e brezegenn en o skol :

« Bugale skol Sant-Fregant a zo laouen d'ho trugaerkaad evid ar blijadur ho-peus greet dezo, digwener diweza, o tond beteg enno.

« Ho sinema en-deus greet deom kalz plijadur hag ive ar hanaouennou ho-peus roet deom da glevet. Or halenou a zo bet lorch enno o vond war ho roudou dre istor Breiz.

« Re abred ho-peus kuiteet alhanom, mad soñjal a reom e helloh dond en-dro er bloaz a zeu. Da horthoz n'a bedo evidoh, a houlennno digand an Aotrou Doue hag an Itron-Varia, skultha warnoh, war ho labour ho-war or Bro-Breiz, o gwella bennoz. »

24-4-59. Bugale Skol St-Fregant.

Abaoe an niverenn ziweza, eo bet or Sekretour-Meur, e Postulat ha Novisiat Leanezed ar « Gonsespion Dinamm » e Sant-Meven (Ille-et-Vilaine).

Warlerh e gaozeadenn e-neus resevet ar gerig-mañ digand ar Zuperiorez-Veur :

« La Supérieure Générale des Religieuses de l'Immaculée-Conception, avec ses remerciements pour la bonne conférence si intéressante. Meilleurs vœux pour le succès de votre apostolat. »

Saint-Méen (I-et-V.), le 24-4-59.

Al leanezed-mañ o-deus kalz a skoliou e Bro-Leon. Meur a hini anezo a ra labour vad war ar brezoneg.

Abaoe ar heleier diweza ez eus bet roet prezegennou skeudennet er skoliou-mañ : Plouenan (p. ha m.), Plougar (p. ha m.), Kleder (m.), Leskonil (m.), Treffiagat (p.), Landrevarze (p. ha m.), Kerlouan (p. ha m.), Sant-Fregant (p. ha m.), Kernouez (p. ha m.), Sant-Yvi (p. ha m.), Kerrien (p. ha m.), Lanvenegen (p. ha m.), Perret (p. ha m.), Sant-Divy (p. ha m.), Sant-Thonan (p. ha m.), Plouedern (p. ha m.), Ar Forest-Landerne (p. ha m.).

E Tregaranteg an ao. Person e-noa pedet ar Bleun-Brug da rei eun abadenn d'e barrezioniz eur zulvez da noz (sul ar Hazimodo). An drederenn euz tud ar barrez en em gavas er patronaj, yaouankizou dreist-oll, da zelaou an aotrou Seite. Bleun-Brugou ha levriou brezoneg a oe gwerzet da fin an abadenn.

E Douarnenez, yaouankizou ar J.M.F. an darnvuia anezo euz al lycée, a bedas or Sekretour da rei dezo an abadenn a ro da vugale ar skoliou. Goude e brezegenn e-neus resevet al lizer-mañ digand ar penn-rener, an ao. Deshayes :

« Je tiens à vous remercier encore une fois pour la formidable soirée que vous avez fait passer et pour la magnifique séance que votre conférence a engendrée.

« Jamais nous n'avions eu un tel succès... et ceux qui sont venus sont sortis ravis. C'est la première fois que je recueille des propos disant le contentement d'être venu à une séance ... »

Kenstrivadegou.

Levrig ar honkourioù a vez gwerzet a verniou dre ar skoliou. Teir voulladenn a zo bet gwerzet dija. Goulennit diganeom al levrig-se evid eun timbr a 25 lur.

Dervez mignonij ar Bleun-Brug e Lañgoñned, d'an 12 a viz Ebrel.

War-lerh barradou-glaou ar mintinvez, hag a hellje beza kaset ar vodadeg-se da neitra, e oe frealzet ar halenou gand heol splann an endervez, hag a lakaas da skedi en he haerpa iliz-parrez Lañgoñned.

Adaleg ar mintin e tigueuze ar Helhiou digemeret gand an Ao. Puilh, rener Kelh Keltieg Lañgoñned. E-pad an overenn e oe kanet kantikou brezonek. War-lerh an overenn, en em vodas an oll e ti Le Puilh evid an dijuni, heb beza dizoñjet dañsal araog, keemnt ha diskouez o anaoudegez-vad da dud Lañgoñned.

An Aotrou Sten Kidna a gontas buhez Youenn en Diberder (Doue d'e bardono !). a zalhas en Emzao Brezoneg eul leh pouezuz ha nebeud anavezet. Da heul ar prezezer, e redas ar zelaouerien dre ar vro leh ma tastume Youenn en Diberder kanaouennou ha marvailhou digand tud ar bobl-se a fell deom servij hag a vez dilezet re aliez, siwaz.

Dindañ an heol o para, e oe dañsadeg war ar blasenn. A-benn merenn-vihan, kinniget gand ar Bleun-Brug, e oe klevet mouezioù dudiuz ar Puilh, Yann Dour hag e wreg.

Goude-ze e tisplegas Gerard Pijon, deuet euz an Naoned, ster Troveni Lokorn : hag e tisklerias perag e fell d'ar Bleun-Brug boda ar yaouankizou a-benn ar gouel braz-se.

Meur a hini a gôzeas, en o zouez an Ao. beleg Derian, keuz gantañ ne vije ket bet yaouankizou ar Helhiou e pardon braz Santez-Anna Wened.

Evid kloza an dervez, Gérard Pijon a lavas petra hell ober yaouankizou Breiz evid rei eur zao nevez da oberenn vraz Yann-Vari Perrot.

Devez a vignoniez Lokorn.

Pevare devez a vignoniez ar Bleun-Brug a zo bet greet e Lokronan-Kerne d'an 3 a viz Mae.

Eur hant bennag a re yaouank a oa deuet euz Bro-Wened, Bro-Gerne ha Bro-Leon.

E-pad an overenn-bréd, kanet gand an ao. Priol, aluzenner Bleun-Brug Kerne, an ao. Thomas, person Plonevez-Porze a reas eur brezegenn war spered an Droveni ha buhez sant Ronan : « Petra eo an Droveni ? eur pelerinaj a bedenn hag a binijenn. greet war roudou sant Ronan. »

Pedet eo oll yaouankizou ar helhiou, tagadou ha lazou-kana, da zond, d'an 12 a viz Gouere a zeu, da gemer perz e Troveni vraz sant Ronan.

Erruoud a raint e Lokronan d'an 11 diouz an noz. Dond a raint euz pevar leh, war droad : Plogonneg, Kerlaz, Plonevez-Porze, ha Kergoad, evid digotezoud er memez amzer war blasenn Lokronan. Ar hirri o digaso a jomo a-zav eta er pevar leh-se.

Goude an overenn-bréd e oe korolloù war ar blasenn hag eur gentel deski kanaouennou brezoneg, er skol, dindan renadur an ao. Abjean, rener kanerien Landi.

Ouz taol, goude, e oe laouen braz an dud. Ar zal, a-raog fin ar préd a deuas da veza eur mor a gan.

Goude ar préd e oe greet eun dro en iliz da woled he haerderiou, displeget deom gand an ao. Person.

An oll a heulias goudeze Gait Coadou hag e oe greet an Droveni vihan. Gerard Pijon, war ar menez, a roas da houzaud petra eo bet an Droveni-vraz diweza. Goulenn a reas digand ar yaouankizou a oa eno, digas ganto e-leiz a vignoned d'an Droveni vraz a zeu, d'an 12 a viz Gouere, hag ober an Droveni-se gand eur spered a feiz hag a binijenn.

Eur verenn-vihan a oe servichet gand ar Bleun-Brug, evid kloza an devez. An ao. Priol a lavaras neuze petra horthoz yaouankiz ar meziou, digand yaouankizou ar Bleun-Brug : hada levezet ha spered breizad en o mesk. An ao. Gab ar Moal, rener ar B. B. a bouezas war ar memez kudenn : « Arabad deoh ankounac'haad ez oh, en hevelep tro, kristen ha breizad, hag a tleit rei d'ar re all ar pezh ho-peus kavet hoh unan. »

Labour ar Bleun-Brug e Plougastell hag e Elliant.

Bodadegou, a zo bet greet ive e Plougastell, hag e Elliant evid rei da houzaud da dud ar parrezioù-se, petra eo ar Bleun-Brug. Prezegennou gand ar Frer Seite, an aotrounez personed, an ao. Ropars, prezidant B. B. Plougastell, hag an ao. Kergourlay, kuzulier-meur Penn-ar-béd ha prezidant B. B. Elliant. Evid echui e oe roet eun abadenn « projection » war gouelioù ar Bleun-Brug.

Troveni Vraz Lokorn.

« Euz Lokronan-Koad-Neved, war Bro-goz ar Porzou,
« Sonit, kleier benniget, son galv or pardonioù,
« Ha c'hwit klotig Sant Ronan, laquen ha gand dudl,
« Sonit, sonit an « Hirglaz » da zond d'an Droveni. »

E-doug an hañv a zeu, kerig Lokronan a zacho evez an oll e Breiz-Izel. D'an 12 ha d'an 19 a viz Gouere e vo greet eno Troveni vraz Sant Ronan, a zigouez beb c'hwet vloaz.

An **Droveni** eo ar brosesion a ra an dro d'ar Minihi, da lavared eo d'an douarou a oa stag gwechall ouz manati Sant Ronan.

Sant Ronan, ginidig euz Iwerzon (Irland) goude beza savet parrez **Lokournan-Leon**, a deuas da jom da **Lokronan** (Lok-Ronan) hag a vevas eno er binijenn en eur kaerra Bro-Gerne (XV^{ed} k.) kaerroh c'hoaz gwechall p'he-devoe he zour uhel bet **Hillion**. E gory a oe digaset d'e Lok koz, a deuas da veza Lokronan, e leh ma kaver hirio e vez, bet nevezet gand an dukez Anna Vreiz. Warnañ ema unan euz ilizou kaerra Bro-Gerne (XV^{ed} k.) kaerroh c'hoaz gwechall pehe-devoe he zour uhel bet diskaret gand ar gurun er bloaz 1808. Eur barrez all e eskopti Sant-Brieg a zoug ivez e ano : **Laurenan**.

An **Droveni vraz** eo an hent a ree Sant Ronan, eur wech beb sizun, evid ober pinijenn. An **Droveni vihan** hag a vez greet beb bloaz eo an hent a ree bemdez ar Zant.

Peb Breizad a dle ober an Droveni da vihanna eur wech en e vuez. Ha greet ho-peus ho Troveni ? Ma n'ho-peus ket, it da **Lokronan** d'an 12 pe d'an 19 a viz Gouere, pe grit anezl en ho part hoh-unan, war ar pemdez, etre an diou zulvez.

An Droveni vraz, daouzeg kilômetr dezl, a dle beza greet heb kaozeal hag en eur bedi a-hed an hent. Ar gwella eo loh euz ar vourh da bemp eur, klevet an overenn ha komunio e chapel Plas-ar-Horn, war ar Menez, ha distrei d'an iliz parrez goude.

Va unan em-eus bet greet evel-se, hag anzav a ran on bet skoet gand ar pez am-eus bet gwelet a-hed an hent : familhou a-bez, euz an tad-koz beteg ar vugale vihanna, oh ober o zroveni gand eur feiz brividig en eur bedi hag en eur gana.

Gand a reoh, na dit ket d'an Droveni evel an douristed. En an Doue, bezit bepred leun a zoniañ ouz gizioù santel on Tadou.

V. S.

Levriou nevez.

Deuet ez eus bet deom eul levrig galleg evid ar skolioù, embannet gand « Les éditions de l'Ecole, 11, rue de Sèvres, Paris (6^e) » ha bet savet gand **J. Le Gouil**, kelenner kristen e Kemperle. Eun doare katekiz bihan eo hemañ war istor ha douaroniezh Breiz, mad kenañ da veza laket etre daouarn an oll vugale. Hen erbedi a reom ouz on oll vignoned. Ne goust nemed 100 lur.

Diskou nevez.

Kenerien Landi o-deus nevez embarinet eun disk all : « **Gouel an oll-zent e Breiz** ». Eun disk braz eo ha kaer meurbéd evel ar re-all en e raog. Prenit anezañ, hag ouz e zelaou e teuo an dour en ho taoulagad. En eun amzer ma kaner ken nebeud a gantikou brezoneg en or parrezioù, e hellou, gand Diskou an aotrou Abjean, kure Landi, en em 'frealzi m'ez gér, gand ar pez ne glevit mui en hoh iliz. — Ti Wolf, Mouez-Breiz, e Kemper a gendalh da embann diskou brezoneg ken brao-all. Skrivit dezal evid kaoud digantañ ar roll anezo, ha goude c'hwit raio ho tibab.

Advouladur ar Barzaz-Breiz.

Abaoe 1939, ne oa ket bet advoullet ar Barzaz-Breiz. Koulskoude, kalz Bretoned a glemme o veza na hellent ket kavoud an oberenn vrudet-se, diviet pell a oa. A-drugarez da EMGLEO SEVENADUREL BREIZ PARIZ, ema leor Kervarker dindan ar wark hag e teuy er-mez e miz Gouere. Gwerzet e vo 1.500 lur da nebeuta. Met izili ar hevrédigeziou breizag (kelhioù, bagadoù) ha koumananterien ar hazetennou brezoneg a hell rakprena dioustu :

1.250 lur franco evid 1 skwerenn ;
1.150 lur franco pa brener 5 skwerenn ;
1.100 lur franca pa brener 10 skwerenn.

Ar helhioù ha bagadoù a vo aotreet da werza goude-ze al leor 1.500 lur, hag ar gounidegezh grêt e-giz-se a jomo e kef ar helh pe ar bagad.

Kasit an arhant da : Entente Culturelle Bretonne, 3, rue Francis-Garnier, Paris (17^e), C.C.P. 97 92.77 Paris.

Diwar « Ar C'hilhog », kanadig brezoneg Skol Plouenan.

Priziusoh eged iliz-veur Kastell-Paol...

Lakaom e vije iliz-veur Sant Paol Aorelian o vond da goueza en he 'foull. Lakaom e vije an teñzor mèn-se e riskl da vond da netra, da veza dismantrret, freuzet da virviken. Daoust ha ni, Bretoned, a jomfe dizeblant, heb ober van, heb ober netra, evid salvi eur savadur ken kaer, penn-oberenn on Tadou ?

Koulskoude ar c'haerra santual a zo da genta eun oberenn danvezel, eun dra a goad hag a vein. Hogen eur yez a zo da genta oberenn speredel eur bobl, meurbed a-uz da gement oberenn kizellet gand daouarn ampart mab-den.

Ar brezoneg, on teñzor speredel, a zo tost d'eun dismantr mantruz. Daoust ha n'eo ket eur vez evid on pobl chom dizeblant dirag dismantrou ken priziuz ?

Eur vroad ha ne ra netra evid enori, evid lenn, evid skriva, evid kelenn, evid uhelaad, evid pinvidikaad e yez, daoust ha bez e hell beza añvet eur vroad yaouank, heo ha nerzuz ?

Ne gredan ket !

Ar foar.

Eur blijadur eo din klevoud gand va zud mond ganto d'ar foar. Daoulagad ha genou a oa digor-frank a hellit kredi ! Kemend all a draoù ! E-leiz a voh bihan e kasedoù ha re all brasoh staget gand eur gordenn. Pebez you ! Al loened-se ne garont ket beza hejet ha dihejet evel-se.

Pelloh e oa eur blasennad saout. Lod o rual an eil gand egile, o vleujal beteg bouzara tud.

Hag e kleven ar wazed oh ober o hont, o houlenn distaol. Med er foar pep hini a zivenn e dra gwella ma hell evid ober foar vad.

Kezeg ne oa ket kalz, rag ar stlejerien-tan o-deus kemeret o leh. Leueou bihan a oa ivez ha defved. Berr e kavis va amzer, o weloud kement-se a draoù.

Olier PENVENN, 11 Vloaz, Kerameal, Plouenan.

Eureud.

Laouen om bet o houzaud ez eo bet eureujet e Pariz, d'ar 17 a viz Ebel, an Ao. **Jean-Jacques Kerdilès**, rener ar Studierien Vreizad, hag an dimezell **Marie-Thérèse Pageau**, euz Kelh Keltieg « Jabadao ». Levenez hir d'ar priedou nevez !

Gouel breizeg e Solesmes (Sarthe).

Bez' ez eus bet amañ, disul diweza, koulz lavared eur Bleun-Brug bihan.

Bretoned Sarthe o-deus krouet eun « Amicale des Bretons ». E Le Mans ez eus eur 6.000 bennag a Vretoned. O hevrédigez he-deus war-dro 13 bloaz, gand an Aotrou Orvoen en he 'fenn.

Kevrenn Sablé a zo yaouankoh, med kregi mad a ra. War-dro 400 Breton a zo e k'ér Sablé, tost da abati Solesmes. Rener ar gevrenn-se, an ao. René-Alain Le Meur, euz Elliant, a zo deut da houlenn digand Tad Abad Solesmes, an aotre da lida amañ eur pardon. Ha setu ar Vretoned deut da Solesmes d'an overenn 11 eur, lavaret gand an Tad Abad Grêt e-neus ive eur brezegal hallig echuet e brezoneg yah, me lar deoh. Meneh ginidig euz eskoptioù Breiz-Izel a oa eno ive, eveljust. Kanet on-eus ar hantikou koz a ganem gwechall er gér, hag unan nevez am-boua mall da zelaou.

A-dra-zur, mogerioù koz iliz-parrez Solesmes n'o-devoa biskoaz klevet kana gand kement a nerz nag a galon. Goude an overenn e oa leun-kouch plasenn an iliz gand an dud deut da weled ar Vretoned en o gwiskamanchou kaer. Bretoned a beb tu gand biniaou ha bombard ha bannieloù ive, benniget gand an Tad Abad pa oe echu an overenn. Ar wazed a zo deut da zeni e liorz an abati ha kanet o-deus « Bro Goz ma Zadou ». An Tad Abad a oa laouen kenañ ha ni ive. Kalz a vad he-deus grêt an abadenn-se e Solesmes hag e Sablé. Aotrou M'ér Le Mans, hini Sablé (deputeed o-daou) o-deus skrivet e oa red dezo chom e Pariz. Is-prefed La Flèche e-neus en em zigarezet dre ma oa eun dra bennag en dervez-se er Prytanée. An tri aotrou-ze a zo Bretoned ! Met er bloaz a zeu e vo an traou kaerroh c'hoaz, gand gousperou ha prôsesion. Evid an taol kenta eo bet eur burzud.

(Diwar lizer eur manah euz Solesmes,
kaset deom d'an 8 a viz Mae.)



GOUELIOU AR BLEUN-BRUG

E PLOUGASTELL (Finister)

D'ar 14 a viz **EVEN**.

Dindan renèrèz an **Ao. 'N Eskob FAVE**.

Azaleg 8 h. 30 : **KENSTRIVADEGOU** renet gand an Ao. Chaloni
Ar Ster, iz-rener an Deskadurez.

Da 11 h. : **OVERENN-BRÉD**, prezeget gand an Aotrou Chaloni
Bihan, person Plougasnou.

Da 14 h. 30 : **ABADENN VRAZ**.

1° **Koroll, Son ha Kan.**

2° **Mouez reier Plougastell** : Ugent taolenn veo war
istor Bro-Plougastell.

3° **Prosesion vraz** Bleun-Brug Leon.

E LANGONNED (Morbihan)

d'an 21 a viz **EVEN**

KENSTRIVADEGOU — OVERENN BRÉD — KOROLL HA KAN

E ELLIANT (Bro-Gerne)

D'ar 5 a viz **GOUERE**.

Bleun-Brug Melenig renet gand an **Ao. 'N Eskob FAVE**.

Azaleg 8 h. 30 : **KENSTRIVADEGOU**.

Da 11 h. : **OVERENN-BRÉD** prezeget gand an Aotrou Chaloni
Cotten.

Da 14 h. 30 : **ABADENN AR BLEUN-BRUG MELENIG**

1° **Koroll, Son ha Kan.**

2° **Breiz a gan.**

3° **Prosesion Vraz** Bleun-Brug Kerne.

**AR BLEUN-BRUG EO GOUEL BRAZ AR VRETONEZ
PEB BREIZAD A YA BEB BLOAZ D'AR BLEUN-BRUG**